

Kanlouennou

SanTel


ha


Komplidou

AR SUZ

gant

M. Glannour





oo  
 niverenn genver  
 numéro : 9 janvier 1960.  
 ooo


Dastumadenn drimiziek a Gelennouriezh.

Rener : Armañs Ar C'halvez, Skol Sant Erwan, PLOUEG-AR-IBR .

Priz an niverenn voutin 2 lur nevez. Priz ar c'houmanant : 10 lur.

Kont-Red Post : REVUE SKOL, PLOUEZEC. C D N . RENNES 1911 06.

Priz an niverenn - mañ : 4 lur nevez.



S K O L , revue trimestrielle de pédagogie ,  
 dirigée par l'Abbé Armand LE CALVEZ, directeur Skol Sant  
 Erwan, PLOUEZEC, C D N ,  
 publiée sous les auspices de l'Association Bretonne  
 d'Education Nouvelle.

Prix du numéro ordinaire : 2 F.N. Abonnement annuel : 10 F.N.

Prix de ce numéro : 4 F.N. Prière d'utiliser le C.C.P. ci-dessus.

=====  
 Annual subscription : 10 New Francs , about 15 / , to be sent to  
 Armand LE CALVEZ, Barclays Bank, LLANRWST, North Wales.  
 =====

LENNIT E BREZHONEG KAERAN LEVR AR BED : A R B I B L .

Aviel Sant Mazhe	: 4,50 lur.	Levr ar Furnez	: 3 lur.
Aviel Sant Mark	: 4	Hcheleth	: 2
Aviel Sant Yann	: 4	Habakouk, Hobdia, Yoel	: 3
Diskuliadur St Yann	: 3	<u>Prizioù franko</u>	.

Da vezañ embannet hep dale : Aviel Sant Lukas .

Kas an arc'hant d'an Dll Saint Gall de Pons, Keresperz , LOUANNEC, CDN,  
 K.R.P. : ROAZHON , 519 40 .



Mar deo echu ho koumanant , adpaeit diouzhtu ... TRUGAREZ .

Please , renew your annual subscription as soon as possible , and  
 give notice to the editor .

Inprimatur

Sant - Brieg , ar 6 eost 1959.  
Y. Brochen ,  
vikel vras .

Inprimatur

Brioci , die 4-a oct. 1959.  
H. Gloaguen ,  
v. g.

OMNIA JURA VINDICABUNTUR .

Pap Gwir miret strish gant MAODEZ GLANNDOUR

hag an Dastumadenn SKOL.

REDAKTEUR-CHIEF-GERANT : Armand LE CALVEZ,  
DIREKTEUR-IMPRESAIRE-GERANT : Skol Sant Erwan, PLOUZEC, C. D. N .  
Diakleriet hervez lezenn : Kentañ trimiziad 1960 .  
Dep't légal : premier trimestre 1960.  
Périodique inscrit à la C.P.F.P. sous le numéro 35 323.

KEMENN HAG ALIOU

N'am eus tamm lorc'h ebet oc'h eabann ar c'hanaouennoù santel-mañ. Gouzout a ran kenkoulz ha n'eus forzh piw n'int ket disi. N'eus eus c'hoant ganto diskar ar c'hantikoù kozh a zo, ul lod vat anezho, mestroberennoù bet prizet ha kanet-kenañ. Dreist-holl ma vije ken-trollet kement teñzor gwirion a zo en dastumadoù hon tri eekopti, e vefe stummet ur strobad kaer-dispar. N'eus ket enno ar fals-teneridi-gezh-se pe ar sonerezh-trompilh a gaver ken alies er c'hantikoù gallek eus an hevelep koulz. Santerezh eeun hon tud a vire ouzh save- rion hor c'hantikoù kozh d'ober gant ardoù ha troioù luziet, ha stumm ar brezhoneg e-unan, chomet stag ouzh ar vuhez, a riwalle anezho diouzh ar c'hoarioù kleuz ha diwirion.

Al lodenn vrasañ anezho koulskoude a oa bet savet gant misionerien evit ar misionoù; n'eus ket kalz a c'hellfe servijout e- vit al loderezh an oferenn a-hed marevezhioù ar bloaz. Ha bremañ, gant an implij a reomp muic'h-mui eus yezh ar bobl el Liturgiezh, e rankomp kaout kanaouennoù santel nevez o reiñ tu d'ar fidelel da gemer perzh oberiant e lid Sakramant an Aoter. Memnet a reomp la- kaat hor c'hristenien da gaout o lod eus pinvidigezhioù al levr - oferenn. Ar pajennoù-mañ a glask respont d'an ezhommoù-se.

N'o deus soñj pourvezif pep tra : n'eo ket un den hep- ken, met ksnt a vefe ret gwelout o labourat war ur seurt tachenn, evit kaout a-benn ar fin un nebeut pezhioù parfet a-keñver reoù all chomet distroc'h.

Ret eo mont war-raok evelato hep gortoz muic'h.

Evel 'm an eus hen skrivet dija er eus tu, a gav din, d'ober e tri stumm. Da gentañ, sevel kantikoù nevez tost a-walc'h d'ar re kozh : treiñ e brezhoneg traoù bet savet e galleg; an ton ton zoken a vo miret ... an tu aesañ d'ober eo evel just, met n'eo ket da lavarout e rofe kennebeut all ar frouezhioù pinvidikañ. An heve- lep doare e c'heller adkemer kantikoù brezhonek dianav bet embannet amañ hag ahont, adstummañ anezho, o sevel a-wechoù tonioù nevez evito.

Un eil stumm a zo : kemer pezhioù ar c'han gregorian e- vit o xreñ e brezhoneg evel n'eo bet graet a-viakozh en hor yezh, evit meulganoù ar bloaz dreist-holl. Hep war ebet ez a mat-kenañ ar brezhoneg gant ar c'han gregorian. Ha d'aa soñj eo kalz gwel- loc'h ar pezhioù a c'heller sevel evel-se. Al latin soarvat eo al latin, hag ar brezhoneg ar brezhoneg, ret eo dero'hal kont eus ijin pep yezh; adstummañ tamm pe damm a zo d'ober, met gant pasanted e teu er a-benn eus an taol.

D'an trede e c'heller sevel kanaouennoù nevez-holl her- vez spereb pe testennoù al liturgiezh. War an dachenn-se e plijfe din chom tost-kenañ d'al levr-oferenn, evel an eus graet evit an Asperjex hag ar Vidi Aquam. Pezh a vefe d'ober martese eo aozañ

antifonennoù ha tonioù-displegañ, an antifonennoù da vezañ adkemeret gant ar bobl, an tonioù displegañ da vezañ kenet warno testennoù el levr-oferenn gant ur c'haner hepken pe un nebeut tud ampart. Lakomp evit an Introit, un nebeut antifonennoù e-doug an Azvent, reoù all evit Nedeleg, hag all. Evel-se penn da benn hervez marevezhioù ar bloaz kristen. Met pell emamp c'hoazh digosh ar pal.

Kompren a rit ivez gwelloc'h en implij a c'hellit ober eus kansouennoù 'zo en dastumad-mañ : an Allelouia-où a ginnigan am eus lakaet ganto ar salm 116. N'eo ket da lavarout e vefe ret implij hepred anezhañ. Kalz gwelloc'h eo kemer ar gwerzad merket gant ar misal a c'hellit kaout troet dereat e levrioù-oferenn evel hini Uguen ...

Al labour-mañ a ginnigan dreist-holl da vugale yaouank Skol Sant Erwan Blouezeg, ha da gement breizad a gaon a c'hortoz evit ar brezhoneg un dra bennak eus barzhud ar yezhoù en deiz ar Pantekost.

Maodez Glanndour.


ASPERGES ME : SKUILHIT WARNON

**Ped mp :** Hon selaouit, Aotrou, Tad santel, Doue hollc'halloudek ha peur-badel, + ha kasit eus an neñv hoc'h Ael santel, + ma teuo da zivall, da zifenn ha da skoazellañ ar re holl a zo en ti-mañ. Ni ho ped dre Jezuz Krist hon Aotrou. R/ Amen.

VIDI AQUAM

Savet gant an Ao. GWAZDOUE

ANTIFONENN (Da vezañ kanet gant an holl)




Gwe-let em eus an dour o strinkañ eus an Templ,  
 eus an tu de-hou Al-le-oui a !  
 Ha ke-ment den zo bet gwelc'het gant an dour-se  
 a zo bet sal-vet hag a la-var : Al-le-  
 loui - a ! Al-le-oui - a !

ooo ooo

SALM .....

SALM : (Gant ur vouezh paotr) ha goude ar Salm : An Antifonnenn adarre.



Ren-tit gra-sou d'an Aotrou dre ma'z eo  
 leun a vad-e-lezh, dre ma'z eo peur-ba-  
 del e dru-ga-rez. Gloar d'an Tad ha d'ar  
 Mab ha d'ar Sps-red san-tel evel ma  
 oa er penn kentañ, ha bremañ, ha da vi-ken,  
 a gant-ve-dou da gant-ve-dou, A-men.

G.- DISKOUZIT DIMP, AOTROU, HO TRUGAREZ, ALLELOUIA !  
 R.- HA ROIT DIMP HO SILVIDIGEZH, ALLELOUIA !  
 G.- RA VO DOUE GANEOC'H,  
 R.- HA GANT HOC'H ENE.

PEDOMP.....dre ar C'hrist hon Aotrou. AMEN

War ar Salm 26 : KAN - ANTREN

Va skle-ri-jenn ha va sil-vi-di-gezh ez oc'h-c'hwi  
 Aotrou. Va blegnit, Aotrou, be-tek en- noc'h,  
 plaenait hoc'h hent di- ra- zon.

Antifonenn : Va sklerijenn ha va silvidigezh ez oc'h-c'hwi,  
 Aotrou.

Un dra c'houlenan diganeoc'h, Aotrou :  
 Sed ar pezh a glaskan,

Ma tañvain douster ho ti santel  
 A-hed deizioù va buhez.

Deoc'h-c'hwi, Aotrou, e lavar va c'halon :  
 Va daoulagad ho klask.

Ho fas, Aotrou, an hini a glaskan :  
 N'en em guzhit ket ouzhin.

Va renit, Aotrou, betek ennoc'h,  
 Plaenait hoc'h hent dirazon.

ooo ooo  
 o

SETU VA ZREID, TEMPL ISRAHEL

Kanenn-antren, hervez ar Salm 122

Foz

Se- tu va zreid, Templ Is - ra - hel, O chom a sav ouzh  
 da dreuzoù, Va zreid er - fin, a va Aotrou,  
 O vont e - barzh ho ti san- tel.

Diskan

Tri - det am eus, al - le - oui - a o vont war -  
 raok be - tek ho ti, Va ge - nou leun a veu -  
 leu - di Da ga - nañ deoc'h, Dou - e va joa.

1. Setu va zreid, Templ Israhel,  
 O chom a-sav ouzh da dreuzoù,  
 Va zreid erfin, a va Aotrou,  
 O vont e-barzh ho ti santel.

2. Jerusalem savet divrall  
 Gant mein benet an eneoù,  
 Te eo Kêr-veur an holl bobloù  
 Gant kaerderioù da santual.

Diskan

Tridet em eus, allelouia !  
 O vont war raok betek ho ti,  
 Va genou leun a veuleudi  
 Da ganañ deoc'h, Doue va joa.

3. Ar peoc'h a ren 'kreiz da vuriou  
 Neulidigezh ha levenez,  
 Warnout e veilh an holl Aesles  
 'Us dit e kan sent an Neñvoù.

K I R I E 1 ( Evit An Azvent )

O Tad santel, ho pet tru- ez ( teir gwech )

Krist mab san- tel ho pet tru - ez ( teir gwech )

Spered san - tel ho pet tru - ez ( div wech )

Spered san - tel ho pet tru - ez.

K I R I E 2 ( Evit Ar C'hoareiz ) (Kirial, niv.18)

O Tad santel,ho pet truez. III.Krist,mab santel,ho pet truez

III.Spered san- tel ho pet truez. II. Spe - red santel

ho pet truez.

M E U L E U D I D E O C ' H , A O T R O U

Alloulou !

ANTIFONENN (Gant an holl)

Al - le - lou - ia, neu-len- di deoc'h Ao - trou,

al - le - lou - ia , al - le - lou - ia !

SALM (Gant ur vouezh paotr)

1. Kan -meu - lit an Aotrou , - - - - - Bro - a - dou holl

2. Rak divrall eo warnomp - - - - - e dra - ga - rez ,

3. Gloar d'an Tad , - - - - - ha d'ar Mab

4. E - vel ma oa er penn kentañ , ha bremañ , ha da vi - ken .

1. lidit - - - - - an - ezh -añ, po - bla - dou holl.

2. realded an Aotrou a chom da vir - vi - ken.

3. ha - - - - - d'ar Spe - red San - tel.

4. A gantvedoù - - - - - da gant - ve - dou, i - men.

adkanet e vez an antifonenn gant an holl goude pep gwerzad eus ar Salm.

AL L E L O U I A


( Evit Amzer Fask )

A- Ur c'haner

B-An holl



Al - le - lou - ia Gloar hag enor deoc'h Aotrou



Al - le - lou - ia a - man e - vel en neñ-voù Al - le -




lou - ia Al - le - lou - ia.

A- Ur c'haner



Kan -meu-lit an Aotrou bro - a - doù holl lizit anezhañ  
Rak di- vrall eo warnomp e dru - ga - doù rez fealded an Aotrou  
a chom




da po - bla - doù holl. al-le- loui- ia.  
vir- vi - ken.

H O N T A D H A G A Z O E N N E N V O U ...



1. Hon Tad hag a zo en neñvoù, Ra ge-no deoc'h an holl vedoù,



Hoc'h a-no da ve-zo meule., ka-ret dre holl ha beniget.

2. Ra zeuy en holl grouadelezh - Urzh nevez ho Rouantelezh :  
Ho polontez da vezo graet - Ganimp evel gant an Aeled.

3. Hirio reit dimp evel bemdez - Bara santel ho madelezh :  
Bazit ouzhimp trugarezus - Hervez maz omp-ni pardonus.

4. N'hon lezit ket da vont nepred - Gant temptadur an drouk-spered :  
Hon dilivrit da virviken - Diouzh galloud an deñvalijenn.



O KRIST, TREC'HER

ANTIFONENN (da vezañ kanet gant an holl)

O Krist trec'her, o Krist rener, o Krist o sal - ver.

POZIOU (da vezañ kanet gant ur bodad hepken)

1. O Sal- ver ar bed hoc'h eus trec'het war ar ma- ro  
ar gal-loud a zo deoc'h da vi - ken. O Rou- e ar bed,  
a- ze- zet en gloar Doue, bev oc'h da vi - ken, da  
vi - ken. O Krist trec'her....(gant an holl).

2. O mam -menn a vu-hez, ro - it kresk d'hor feiz,  
be -zit hon es - per en neivoù ha la - kit en -nomp ho  
ka-ran-tez nerzh- us. O Krist, trec'her.....

3. O le - on You-da Rou-e ar rou-an- ed, gou-ar-  
nit hor bro skuilhit war- ni ho spe - red, a zo nerzh  
skleri - jenn ha bu - hez. O Krist trec'her !...

4. O c'hwi a zeuio, un deiz, da varn an dud,  
deuit da grou- in ar be-doù ne- vez, ha roit  
dimp ni trec'h peurba- dus ho ti -ba- bi - di  
en ho le- ve - nez. O Krist trec'her !

M'HOC'H ADOR, O KORF SAKR

1. M'hoc'h a-dor o korf sakr, eus Mari bet ganet.  
 2. C'hwi'c'h eus ur maro hakr 'vit an den gou-zañvet.  
 3. Pa'z e-doc'h ouzh ar groaz, eus ho kos-tez toul let  
 4. Dour ha gwad a re-das d'hor gwelc'hiñ diouzh pec'hed.  
 5. C'hwi bremañ leun a c'hloar, dis-tan-it hon en-krez,  
 6. Bezit ouzh-imp he-gar en di-vezh hor bu-hez.  
 7. Je-zuz, Doue ha den, dous-ter hon le-ve-nez,  
 8. Be-zit hor skleri-jenn, 'hed ar beur-badelezh.

A - men. Hervez komzoù an Ave Verum

Evit bennozh ar Sakramant pe ar Gomunion en Oferenn.

Da vezañ kanet ar gwerzadoù ampar gant ur vouezh pe un nebeut hepken, ar gwerzadoù par da vezañ respontet gant an holl.

GLOAR DEOC'H-C'HWI, JESUS

DISKAN-Gloar deoc'h-c'hwi Jezuz hor Salver, mab an Tad ha  
 mab ar Werc'hez, Gloar deoc'h c'hwi, Krist Rou - e.  
 POZ 1. O Krist ga-net eus ar Werc'hez, Dre nerzh ar Spered  
 hep mui ken, Deoc'h e kan-omp gant mouezh an Ael -ez  
 e - nor ha klod da vi - ken. Gloar deoc'h-c'hwi

Poz 2.

Doue diskennet en hon touez  
 Sklerienn splann eus sklerienn  
 Sellit ouzhimp en ho trugarez  
 Hor pareit da viken.

Poz 3.

Eus an Ejipt hoc'h eus tennet  
 Ar bobl dalc'het er sklavelezh  
 O Mosaer, gouarnit ho teñved  
 Hag hor renit da viken.

Poz 4.

O Krist, trec'hour war ar maro  
 Heol al levenez peurbadel,  
 Hon sieubit eus an noz garo,  
 Hor goulasuit da viken.

ELEC'H M'EMAN AR GARANTEZ


Diskan 1.

An holl: Elec'h m'e-mañ ar ga-ran-tez e-no 'mañ Dou-e




Mouezh A

1. Peogwir hoc'h eus hon das-tu- met, holl a- ge- vret.
2. Peogwir hoc'h eus hon das-pre- net, holl a - gevret.
3. 'vit ma c'hel-limp mont d'ho kwe- let, holl a - ge- vret.




Mouezh B

1. Dindan re - ne- rezh ho kam - mell en ho tro-pell.
2. Ha bet ouzh-imp tru- ez vras- añ c'hwi da gen-tañ.
3. Gant an holl sent en ho splann-der, Doue sal-ver.




Diskan 2

An holl :Lakit ennomp ho ka-ran-tez , Krist,Mab Dou-e.



Mouezhioù A ha B


1. Ra vimp 'vit hoc'h heuliañ dalc'hmat, o me - saer mat.
2. Ra vimp e - vit en em ga - ret, ni ho teñ - ved.
3. 'Hed an am-zer - vevh di-der- men da vir- vi - ken .



Da schuiñ : A - men .

UR WECH UN DEN


Ur wech un den +a reas ur ban-vez bras hag eñ da



gas e ve - vel da goulz ar pred da la-va-rout d'ar




gou-vi-di e oa poent dont + Rak prest eo pep tra




g/. Deuit 'ta, ha debrit va ba -




- - ra hag e - vit ar gwin am eus ac-zet



deoc'h c'hwi. + Rak prest..g/. Klod d'an Tad



ha d'ar Mab ha d'ar Spe- red san - - tel. Rak prest..



AR MEULEUDIOU

GOUDE BENNOZH AR SAKRAMANT

Meuleudi da Zoue  
Meuleudi d'e ano Santel  
Meuleudi da Jezuz Krist, gwir Doue ha gwir den  
Meuleudi da ano santel Jezuz  
Meuleudi d'e galon sakr  
Meuleudi da Jezuz e sakramant an Aoter  
Meuleudi da vamm Doue, ar Werc'hez gloriüs Vari  
Meuleudi da Vari konsevet hep pec'hed  
Meuleudi da Vari douget d'an Neñv  
Meuleudi da ano Mari, mamm ha gwerc'hez  
Meuleudi da Sant Jozef, pried glan ar Werc'hez Vari  
Meuleudi da Zoue dre an Aelez hag ar Sent eus ar Baradoz

ooo ooo  
o

RA VO MEULET E PEP ANZER

Fa 1.

Ha vo meu - let + e pep an - zer sa - kra - mant  
sant - el an aot - ter. Gloar d'an Tad ha  
E - val ... ha da  
d'ar Mab ha d'ar Spered sant - el.  
vi - ken, a gantvedoù da gantvedoù. A - men.  
Ra vo meu - let.

TRUGAREZIOU AN AOTROU

Tru - ga - rez - ioù an Aotrou a ga - nin  
 da vi - ken. Tru - ga - rez - ioù... G/A gant - ve - doù  
 da gant - ve - doù, me 'venn'em - bann ho fe - al -  
 ded war va mu - zel - loù. Tru - ga - rez - ioù.  
 G/Gloar d'an Tad ha d'ar Mab ha d'ar Spered Sant - el,  
 e - vel ma oa er penn ken - tañ ha bre - mañ ha da vi -  
 ken a gant - ve - doù da gant - ve - doù. A - men.  
 Tru - ga - rez - ioù .

ME HOC'H ADOR DOUJUS ( ADORO TE ... )  
 Da vezañ kanet war an ton gregorian.

1. Me hoc'h ador doujus, Mab Doue kuzhet,  
 A vez o chom gwirion er spesoù sakret,  
 D'en em reiñ deoc'h gant feiz ' troan va c'halon  
 Hep mui gortoz kompren ur mister ken don .
2. Lagad, dorn ha genoù amañ a fazi  
 met diwar ho klevout me ' fell din krediñ:  
 Me ' grad kement hoc'h eus dimp-ni diskleriet,  
 Verb an holl wirionez diskennet er bed.
3. War ar Groez en em guzh ho natur-Doue,  
 Hogen er sakramant, ho stumm-den ivez.  
 Met p'ho kredan amañ, Salver ar C'halvar  
 ' Kredan ober pedenn al laer 'n e c'hlae'nar.
4. Ho korf sakr aoull'et, Tomaz han gwele,  
 hep ho kwelout m'ho kalv va mestr, Va Doue !  
 Grit ma kresko bemdez va feiz muioc'h-mui  
 Maz esperin gwelloc'h ha m'ho karin c'hwi.
5. Evoradur santel eus maro Jezuz,  
 Bara bev, 'vit an den bevañs buhezus,  
 Bezit magadurezh ha nerzh hor gwander  
 Ha bepred d'hon ene, bezit joa, douster.
6. Salver trugarezus, Jezuz va Aotrou !  
 Gant ho kwad va gwelc'hit eus va fec'hedoù,  
 Pa c'hell eus ho kalon un dakenn hepken  
 Glanaat diwar ar bed, holl dorfed mab-den.
7. Krist Jezuz, d'am selloù bremañ goloet,  
 Gouenn a ran ouzhoc'h pezh ' zo va sec'hed,  
 Ma vin evit gwelout leun a levenez,  
 Pas ouzh fas, ho splannder, er beurbadelezh.

Amen.

O NENVOU, SKUILHIT

(Evit amzer an Azvent)

O nen - voù, skuilhit dimp ho klizh, Ra zeuio dimp ar Sal - ver.  
Adkanet e vez : O nenvoù.

1. Na cho - mit ket kouna - ret, Ao - trou, na zalc'hit ket soñj

eus hor pec'he - doù. Setu m'eo di-dud ar gêr santel,

un deserzh eo bre - mañ Si - on, ur gouelec'h Je - ru - za -

lem : Ho templ santel, ti ho splannder, e-lec'h m'o deus hon

ta - doù neu-let ho kloar. R/ O nen - voù.

2. Pec'her - ien omp, tud dic'hlañn ha sao - tret, hag holl omp

kouezhet, e-vel de - lioù gweñ - vet: Hag hon droug-o-be-rou,

e - vel a - vel di-roll o deus hor sam-met kuit : rak kuzh-et ho pos

ho fas ouzh-imp, e-vit hol le-zel e dalc'h hor falla-

gri - ezh. O nenvoù. 3. Gwelit, Ao-trou, anken ha glac'har ho pobl,

de - ga - sit dimp ho kannad : dega - sit an Oan da ren war ar

bed, eus reier ar gouelec'h da ve - nez Si - on, ma tenno

di - war hor choug yev hor skla - ve - lezh. R/ O nen - voù.

4. Bez freal - zed, bez fre - al - zed, va fobl! Se-tu ma teu-

an d'az salviñ : perak chos e'noazh anke - niet ? rak da boan

he deus da ne - ve ead : da sal - viñ a ran. Bez dinec'h-

iet. Rak me eo an Ao - trou da Sou-e, santela - er Is - rael, da sas - pre - ner. R/ O nen - voù.

Sell. ouzh Isahia 45,8 ; 61,8-10 ; 5-6 ; 16,1 ; 40,1.

DISKENNIT PRIM...

(Meulgan an Azvent)

Dis - kennit prim eus an neñvoù Gwir skleri-jenn an e-ne  
oh, Deu-it, Je-zuz, sal-ver ar bed, N'hol lezit ket kreiz ar pec'hed.

Ton all :

Dieken-nitprim eus an neñvoù, Gwir skleri-jenn an e-ne-oh,  
Deuit, Je-zuz, salver ar bed, N'hol lezit ket kreiz ar pec'hed.

1. Diskennit prim eus an neñvoù  
Gwir sklerijenn an eneoù;  
Deuit, Jezuz, salver ar bed,  
N'hol lezit ket kreiz ar pec'hed.

3. Douget gant nerzh ar garantez  
Setu ma tiskennit er bed,  
Heñvel ouzhimp met dibec'hed  
O kemer korf eus ar Werc'hez.

5. O'hwi 'zeulo c'hoazh leun a veurded  
Barner bras an deiz diwezhan,  
Hon difennit a-jal bremañ  
Ouzh hon enebourien douet.

2. Deuit buan, deuit timat  
Evit salvid hon eneoù,  
Evit digoll ar pec'hedoù  
O deus dismeganfet an Tad.

4. Ha goude mervel ouzh ar Groaz  
E pignit e lein an neñvoù  
Da vezad dimp mammenn a c'hras  
Ha gwall-spouren an ifernioù.

6. Meulgan ha gloar hag azaouez  
D'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered,  
A-berzh an dud hag an Aeled  
A-hed an holl beurbadelezh. Amen.

DEUT DIMP EUS AN MENVOU

(Evit Bennozh ar Sakramant pe evit amzer an Azvent ha Nedeleg)

Deut dimp eus an Neñ - voù, Gwir ba-ra an Ae - lez,  
Deut en hor c'ha - lon - où ha reit dimp ka - ran - tez.

Deut dimp eus an neñvoù  
Gwir bara an Aelez,  
Deut en hor c'halonoù  
Ha reit dimp karantez.

Dindan spesoù dister,  
Gwir den ha gwir Doue,  
Ho kwelomp, o Salver !  
Hor Mestr hag hor Roue.

Mesaer madelezhus,  
Mesiaz benniget,  
Hor renit truezus  
En hoc'h hent a reizhded.

Eus an holl bec'hedoù  
Naetait hon ens !  
Hor glac'har, hon daeroù,  
A bed ho trugarez.

'N hor c'halon reuzeudik  
Lakait a nevez  
Da sevel birvidik  
Tan-flamm ho karantez.

Gloar deoc'h-c'hwi, Mab Doue !  
Ha deoc'h-c'hwi, Tad Santel,  
Ha d'ho Spered Ivez,  
O Treinded peurbadel ! Amen.

(Evit an ton, sellout ouzh meulgan gousperoù ar Werc'hez en ofis ar  
Sador)

UR BUGEL A ZO DIMP GANET ...

( Puer natus in Betlehem )

1. Ur bugel a zo dimp ganet, allelouia  
Jezuz, Mesiaz benniget, allelouia, allelouia !

Diskan

Gant laouenidigezh  
Adoromp Jezuz, Mab Doue,  
En ur ganenn nevez.

- |   |  |
|---|--|
| 2. Gwir Vab Doue en em c'hraet den,<br>Evit hor salviñ, pec'herien. | 3. Sklerijenn splann eus sklerijenn<br>E noz ar bed teñval ha yen. |
| 4. Diskennet eo da grouadur<br>An hini 'zo mestr an natur           | 5. Eus ur Werc'hez eo bet ganet<br>An hini ren war an hollved.     |
| 6. Hon doare en deus kemeret<br>Nemet ar pec'hed n'en deus ket.     | 7. Aeled a gan a vilieroù<br>Ken ma tregern bolz an neñvoù.        |
| 8. Ar vesaerien a zo galvet<br>Davet gwir pastor an deñved.         | 9. Gourvezet eo er c'hraou dister<br>Da gelenn dimp an enziouer.   |
| 10. Ar Vajed a galon laouen<br>O deus gwelet e steredenn.           | 11. Profet o deus hep douetañs<br>Ar mirr, an aour, hag an ezafis. |
| 12. Ha ni 'velto a greiz kalon<br>Kinnigomp bep a zonezon.          | 13. War an uhel, gloar da Zoue<br>Ha d'an dud vat, peoc'h an enez. |
| 14. Mab Doue 'gemer hon doare<br>Ma vimp ivez mibion Doue.          | 15. E jec'h hon adginivelezh<br>Meulomp an Tad a vadelezh.         |

16. D'an tri Ferson da virviken  
Meuleudi, gloar, enor, amen !

Miz du 1955

DOUE GANIMP, EMMANOUËL

Dou-e ganimp, Em-ma-nou-el, Al - le - lou - ia  
 Hervez pro-me-sa Gabri-el, Al - le - lou - ia  
 A zo pa-ret en Is-ra-hel, Al - le - lou - ia,  
 Ga-net eus ar Werc'hez fi-del, Al - le - lou - ia.

Doue ganimp, Emmanuel, Allelouia !  
Hervez promessa Gabriel,  
A zo paret en Ierahel  
Ganet eus ar Werc'hez fidel.

Verb Doue 'zo mab da Vari  
En em c'hraet den 'vit hor salviñ  
Bugel bihan en heñvel  
Hag en Roue Jeruzalem.

Ra vo gant an douar a-bezh  
Enoret e vestroniezh  
Anavezet e sklerijenn  
Ha kanneulet da virviken.

Ar c'hantik-mañ a c'hell bezalakaet war gont ur solo, ar bobl  
o respont gant youc'hadennoù an Allelouia-oh. Pe c'hoazhkemer ar pos  
kentañ e giz diskan.

Ton ha testenn gant N. Glanndour



O JEBZUS, ANV AN DOUSAN

( Jesu, dulcie memoria )

( War don ar meulgan latin )

1. O Jezuz, anv an douzan  
A re d'ar galon ar gwir joa,  
Met dreist ar mel ha dreist pep tra  
Eo gant Jezuz gallout bezañ.

2. Netra ken flour ne vez kanet  
Netra ken dous ne vez klevet  
Netra ken kaer ne vez sodjet  
Hag anv Jezuz benniget.

3. Jezuz, esperans ar pec'her,  
Ken truezus pa'z ho peder,  
Ken madelenhus p'ho klasker,  
Febezh eurvad pa'z ho kaver.

4. N'eus teod a c'hellfe diskleriañ  
Ha plusenn a c'hellfe skrivañ,  
N'eus 'met ar galon 'vit tanva  
Petra eo karet anezhañ.

5. Besit, Jezus, hon levenez  
E kreiz enkresion hor buhez  
Besit hor gloer en ho palez  
A-hed an holl beurbadelañ. Amen.

NI HOC'H ASPED

( Meulgan ar C'hoareiz )

Ni hoc'h as-ped, krouer ar bed En amservesh-mañ da gle-vet  
Pe-denn ha keuz hon e- ne- oñ a brofomp deoc'h gant hor yunoh.

Ni hoc'h asped, Krouer ar bed,  
En amservesh-mañ da glevet  
Pedenn ha keuz hon eneoñ  
A brofomp deoc'h gant hor yunoh.

C'hwi a wel hor breskadurezh  
Hag holl bec'hedoñ hor buhez  
Met roit dimp gras ho pardon  
Pa sistroomp deoc'h a galon

Klask a reomp gwir binijsenn  
Dre aluson, yun ha pedenn :  
Evit ma c'hellimp ho meulñ  
Pareit ennoomp pep gouli.

Hor c'hoantegesh a gatisomp  
Ho kras nerzhus a c'houlennoomp  
Ma yuno ivez hor spered  
Diouzh banvez hudur ar pec'hed.

Ni hoc'h asped, O Treinded sakr,  
Ni a gement a so fallakr  
Da reiñ d'hon eneoñ direizh  
Adsav ha nerzh dre ar C'hoareiz. Amen.

HOR SELAQUIT

(En amzer ar C'hoareiz)

Her se-laout, Aotrou, hag ho pet truez dre m'hon eus  
 pec'h -et ouzhoc'h. An holl a adkan : Hor selaquit

1. E - trezek ennoc'h, dasprener an holl-ved e sa-vomp selle  
 hor c'ha-lo-noù keuziet : O Krist, selaquit mouezh ar re hoc'h  
 asped.  
 R/ Hor selaquit

2. Brec'h nerzhus an Tad, maen-korn ar sava-dur, dor ar Ba-radoz,  
 hent ar silvi-di-gezh, teurvezit gwelc'hiñ hon ene-oh nam-met.  
 R/ Hor selaquit

3. Ho weurded, Aotrou, a bedomp gant glac'har, stouit ho skouarn  
 da gle-vout hor gouelvan, en ho ma - delez, diverkit hor mankoù.  
 - 28 -  
 R/ Hor selaquit

4. Gwall-gablus ez omp di-razoc'h-c'hwi Jezuz, Met hor pec'hedoù  
 a an-za-vomp le-al, C'hwi trugarezus, ro-it dimp ho pardon.  
 R/ Hor selaquit

5. Dan-va-dig Dou-e, droukskoet di-dru-eg, C'hwi bet kondaonet  
 'vidomp-ni pec'he-riou : mirit deoc'h Aotrou ar re hoc'h eus prenet.  
 R/ Hor selaquit

EUS DON AN ISLONK

Antif. 1 : Eus don an is-lonk e c'har-man da -vedoc'h lo - trou.

Antif. 2 : En lo-trou ec'h ee-per va e - ne en e gomz am

eus fi-ziañs. Antif. 3 An lo-trou'zo tru-ga-rez en - nañ

sil - vi - di - gezh lar - gen - te - zus.

1. Eus don an islonk e c'harman davedoc'h , lo - trou

2. Mar mirit kont , Aotrou eus hor fallen - te - zioù

3. En Aotrou ec'h esper va e - ne

4. Rak an Aotrou 'zo tru-ga - rez en - nañ

1. Aotrou, selaouit va gal - va - denn :

2. Aotrou , piv a c'hellc'ho derec'h - el ?

3. En e gomz am eus spi

4. Silvidigezh lar - gen - te - zus,

1. Ho tivskouarn da stouo da gle - vout

2. Met ennoc'h emañ pardon ar pe c'hed - oh

3. Va ene a c'hortoz muioc'h an lo - trou

4. Eh an hini a zi - eu - bo Is - ra - hel

1. Mouezh va das - pe - den - noñ.

2. Ma viot ser - vi - jet gant dou - jañs.

3. Eget ar war - ded tarzh an deiz.

4. Eus e holl bec'h - ed - oh.

EUS A GREIZ DONDER VA FOANIOU

(Evit Oferenn an Anaon, pe evit amzer ar C'hoareiz d'an Ofertouer)

Eus a greiz don-der va foa - niou, E c'har-man dav  
 doc'h A - trou, O! Aotrou, se - la - ouit va c'hlem  
 mou. A - men.

1. Eus a greiz donder va foanion  
 E c'harman davedoc'h, Aotrou, o!  
 Aotrou, selaouit va c'hlemmou.

3. Hervez hon droug mar'd omp barnet  
 Aotrou, piv a vezo kavet, o!  
 Glan awalc'h da vezañ salvet.

5. Esper an eus ennoc'h, Aotrou,  
 Fiziañs an eus en ho komzou, o!  
 Pardonit din va fec'hedoù.

7. Ennoc'h ez eus brasañ truez  
 Ennoc'h fonnusañ madelezh, o!  
 Ha brokusañ silvidigezh.

2. Troit ho skouarn truezus  
 Strezek va mouezh hirvoudus, o!  
 Bezit ouzhin trugarszus.

4. Met c'hwi a varn gant trugarez  
 Hag a bardon gant madelezh, o!  
 Ho kalon n'eo ket didruez.

6. Muioc'h eget gwarded an noz  
 O c'hcantaat an deiz direpoz, o!  
 A galon sur, me ho kortoz.

8. C'hwi a selaou garm ar pec'her  
 C'hwi a zeu dimp da zasprenner, o!  
 C'hwi a bardon, Doue salver.

9. D'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered  
 Doue unan ha benniget, o!  
 Gloar hag enor da vo rentet.

Amen.

(Evit prosesion Sul ar Bleunioù)

Ar ganerien a grog gant an Antifonenn a vez adkanet gant ar bobl

Antif: O daspre - ner, de-ge- me- rit meu-leu- di hor c'ha-

lo - nou. An holl : O das - pre- ner....

Ar ganerien a gendalc'h gant ar gwerzadoù-mañ ha war-lerc'h pep unan e  
 vez adkemeret an Antifonenn gant ar bobl.

1. Ra ve - zo meu-let Mab Dou- e, An hi-ni' zo di-var-vel,  
 A zo dis-ken-net 'n hon be - te Dre ga-ran- tez peurbadel.

2. D'hor sikour oc'h deut, Mab an Tad,  
 Deut da gemenn ar c'heloù mat,

Bindan ur c'horf douarel  
 Verb al lavarouñ neñvel.

3. Dañvadig Doue bet lazhet  
 Evidomp hoc'h eus gouzanvet

Evit hor silvidigezh  
 Haro kris ha gwall-enkrez.

4. O Krist dibec'h, c'hwi 'c'h eus choazet  
 Ha gant an Tad hoc'h eus skoulmet

Mervel 'vit ar re gablus,  
 Englev nevez peurbadus.

5. Kaset hoc'h eus tan ho Spered  
 Atao purait ho teñved

E kalon hoc'h ebestel,  
 Gant ho Parakled santel.

6. Roue meur an holl gantvedoù,  
 Teurvezit ren hon eneoù,

Levenez ha sklerijsenn  
 Bredañ ha da holl viken.

TUD ISRAHEL, KLEVIT, M'HO PED ...

( O filii et filiae...Evit amzer Fask )

1. Tud Israhel, Klevit, m'ho ped,  
Roue an Neñv er Groaz staget,  
A varo da vev 'zo savet, allelouia !

R/ Allelouia, allelouia, allelouia !

2. D'ar sul vintin da c'houlou-deiz  
Ar merc'hed gant tristidigezh  
A yae gant balzamoù d'ar bez, allelouia !

3. Penaos, emezo, kavimp skor (1)  
Evit ar maen 'zo war an nor.  
Met petra 'zo paz eo digor, allelouia !

4. Un Ael e gwenn 'zo azezet  
En deus lavaret d'ar merc'hed :  
Jezuz ac'hann 'zo dasoro'het, allelouia !

5. Gant Madalen degemennet  
Daou ziskibl a yeas d'ar red  
Da doull ar bez evit gwalet, allelouia !

6. Sant Yann gant mall ha laouen-bras  
D'ar bez arak Pêr a redas  
Met ouzh an nor hen gortozas, allelouia !

7. E-kreiz an diskibien bodet,  
Jezuz 'n em ziskouez o laret :  
Ar peoc'h na vo ganeoc'h bepred, allelouia !

8. Hogen pa glevas Didimus  
E oa bev a nevez Jezuz,  
An diskibl 'chomas douetus, allelouia !

9. Sell 'ta, Tomas, toull va c'hostez,  
Va zreid ha va gaouarn ivez,  
Ha na vez ket pelloc'h difeiz.

10. Tomas o welout kement-se  
Dezhan a respontas neuze :  
Te eo va mestr ha va Doue, allelouia !


Evrus ar re n'o deus gwalet  
Hag hep arvar o deus kredet  
En neñv e vint kurunennet, allelouia !

12. Setu perak gant levez  
Rentomp d'an Aotrou trugarez  
Meuleudi, gloar ha karantez, allelouia !

(1) Skor=harp, sikour

- 34 -

S PERED SANTEL



Spered San-tel, deut eus an Neñv, Deut en e- ne ho  
pu - ga - le, Ma ve- zo gant ho kras karget  
Ar c'ha- lo- noù hoc'h eus krou-et.

1. Spered Santel, deut eus an Neñv  
Deut en ene ho pugale,  
Ma vezo gant ho kras karget  
Ar c'halonoù hoc'h eus krouet.

2. C'hwi 'zo anvet ar Frealzer,  
Donezon an Doue salver,  
Feunteun vuhezus, karantez,  
Tan hag olev (1) a levez.

3. Stummit gant ho seizh donezon  
Diouzh dremm (2) Jezuz neuz hor c'halon;  
Hon luskit, c'hwezh nerzhus an Tad  
D'embann d'ar bed ar c'heloù mat.
